

# STUMMADUR UHEL

W A R A R B R E Z H O N E G



**E LANDERNE (29)  
HAG E PLANVOUR (56)  
EUS PENN-KENTAÑ MIZ EBREL  
BETEK MIZ GOURE**

FORMATION SUPÉRIEURE EN LANGUE BRETONNE  
DE DÉBUT AVRIL À DÉBUT JUILLET  
À LANDERNEAU (29) ET PLOEMEUR (56)



**Stumdi**

aozadur-stummañ war ar brezhoneg  
organisme de formation au breton

**SEZ SOKIAL :**

## **STUMDI**

**MANER KERANDEN**

**BP 311**

**294 13 LANDERNE CEDEX**

**TÉL. : 02 98 21 39 94**

**FAX : 02 98 85 04 37**

**E-MAIL : [bzh.stumdi@wanadoo.fr](mailto:bzh.stumdi@wanadoo.fr)**

**SITE : [www.stumdi.com](http://www.stumdi.com)**



Ezel eo kreizenn-stummañ  
Stumdi eus Product e Breizh.



## KINNIG AR GREIZENN-STUMMAÑ

A-drugarez da 25 bloaz a skiant-prenet hag a servijoù a vicher da vat, e vez kinniget gant Stumdi, kreizenn-stummañ evit an dud deuet, stummadurioù brezhonek diouzh ezhommoù ur publik liesseurt.

Degemeret e vez bep bloaz gant ar skipailh (war-dro 15 implijad) ouzhpenn 300 stajiad er stummadurioù kinniget gant an aozadur eus penn-kentañ miz Gwengolo betek kreiz miz Gouere e 4 lec'h-stummañ :

**Aradon (56), Gwengamp (22), Landerne (29), Plañvour (56)**

- > daou brantad stummadur hir e brezhoneg e-pad 6 miz,
- > ur prantad stummadur uhel war ar brezhoneg e-pad 3 miz,
- > stajoù war tachennoù micher e brezhoneg : bugaligoù, kazeten-nerezh, skrivañ ur senario...
- > hentadoù stummañ diouzh ezhommoù an dud, an implijidi (goulennit teuliad standilhonoù stummadurioù evit an embregerezhioù),
- > stajoù berr,
- > stummadur « Memor ar brezhoneg » evit ar re o doa klevet brezhoneg pa oant bihan.

Stumdi a zo e bal diorren ar brezhoneg dre ginnig hentadoù stummañ diouzh an ezhommoù.

# AR STUMMADUR UHEL BERR HA BERR

## PETRA ?

Degemer a ra ar stummadur ihuel tud hag a zo àr ur vicher divyezhek bennak, pe tud ihuel a-walc'h o live kent, hag a zo o fal tapout kaout brezhoneg flouroc'h dre gomz ha dre skrid. N'eus ket ag ur stummadur skol-veur anezhoñ. Pleustret e vez ennoñ àr ar gomz hag àr skrid, àr ar benveger hag àr an hentennoù-labour, labouret e vez a-stroll ha dre soubidigezh. Ret e vez d'an holl kemer perzh ha kaout intrudu. Ar bras ag ar stummadur-se 'zo stalioù-labour anezhoñ, dre zañvez, kaset en-dro get skipailh stummerion Stumdi ha skoazellerion (aveit ar c'hoariva da skouer). Bep an amzer e vez kentelioù teorikeloc'h (lod anezhe nevez-savet) graet get kelennerion skol-veur.

*Soaz Maria, stummez e penn ar raktres*

## PELEC'H / E-MENN ?

E Landerne (29)  
hag e Plañvour (56)

## PEUR / PEVARE / PEGOURZ / PEGOULZ ?

Eus penn-kentañ miz Ebrel  
betek miz Gouere (3 miz)

## UL LODENN

### ADWELOUT

Lod eus ar c'hentelioù ' zo gouestlet da adweladennoù stank a-benn barrekaat : priziadennoù hiniennel, yezhadur, geriaouegoù, rannyezhouriezh ha doareoù labour.

## LABOURIOÙ

### PLEUSTREK

Ar bras eus ar stummadur ' zo stalioù pleustrek anezhañ : pleustriñ dre gomz ha dre skrid, labourat war enrolladennoù, sevel dafar skridaozañ, dafar kelenn, dafar kleweled, prezegennoù, stalioù, lenn ha deskiñ anavezout al lennegezh.

## 2 RAKTRES BRAS

Daou-ha-daou o do ar stajidi da seveniñ pep a zaou raktres bras : enrollañ ha treuzskrivañ, sevel un teuliad hag ober ar brezegenn da heul pe aozañ ur weladenn hentet.

# AR STUMMADUR PAZENN HA PAZENN

# UN TAOL LAGAD

## WAR AR C'HENTELIOÙ

## HAG AR STALIOÙ A VEZ KINNIGET

(DIWAR PROGRAMM 2011 A C'HELL BEZAÑ UN TAMM DISHEÑVEL E 2012)

Gwez ha gwez all e teu arbennigourien eus an diavaez,  
lod anezho eus ar skolioù-meur, evit stalioù pe prezennoù.

KENTEL(IOÙ)

### LUKIAN KERGOAT

Mestr-prezegenner e skol-veur Roazhon 2



#### ► Istor ar brezhoneg

Pal : stagañ istor ar yezh ouzh istor ar gevredigezh

#### ► Lektologiezh

Pal : Diskouez e ya ar variezon e brezhoneg pelloc'h eget an diforc'hioù rannyezhel

#### ► Distagadur

Pal : Analizañ pennreolennoù distagadur ar yezh

#### ► Yezhadur

Pal : Kinnig pontoù yezhadur en ur gontastiñ gant ar yezhoù all par ma vo tu

#### ► Terminologiezh

Pal : Lakaet war wel perzhioù dibar an termenoù e bed ar gerioù

#### ► Paremiologiezh

Pal : Merkañ tachenn ar c'hrennlavarioù e-touez al lavarioù all

#### ► Joker

Pal(ioù) : Klokaat poent pe boent eus ar c'hentelioù a-raok.

KENTEL(IOÙ) (PLAÑVOUR)

## JEAN-CLAUDE LE RUYET

Tezenn doktorelezh : « Kelenn ar brezhoneg, Komz, liamm ha norm, prezanted e stern peder reolenenn-sannañ ewid brezhoneg ar skolioù ».



### ► Reolennoù diazez ar sanadur e brezhoneg ar skolioù

Pal(ioù) : diskoueziñ war besort reolennoù e c'heller sevel ar brezhoneg komzet ha lakaad e pleustr (dre lâred testennoù a vouezh uhel ; dre c'hoari gant margodennoù).

KENTEL(IOÙ) (LANDERNE) **BOB SIMON**

Komedian, stummer war ar c'hoariva, leurenner



### ► Distagañ brezhoneg

Pal(ioù) : labourat war ar brezhoneg komzet, an distagañ hag al lusk

### ► Eil devezh, gant ar strollad a-bezh

Pal(ioù) : ober anaoudegezh, kaout fiziañs, evit gellout kregiñ gant ar sketchoù

### ► 3<sup>de</sup>, 4<sup>re</sup>, 5<sup>vet</sup> devezh, gant an hanter eus ar strollad ha dre hanter zevezhioù

Pal(ioù) : sevel sketchoù diwar ijin ar stajidi

### ► Devezh da echuiñ : kinnig ha c'hoari ar sketchoù dirak stajidi Plañvour

Pal(ioù) : Mont dreist an aon dirak an dud, er c'hontrol, kaout plijadur.

KENTEL(IOÙ) **JORJ BELZ**

kelenner war an istor hag ar brezhoneg



### ► Skrivagnerion a Vro Gwened

Pal(ioù) : lakaat ar stajidi da zizoleiñ skrivagnerion a Vro Gwened.

KENTEL(IOÙ)

## STEFAN MOAL

Mestr-prezegenner e skol-veur Roazhon 2



### ► Ar brezhoneg hag ar mediaoù

Pal(ioù) :

- roiñ d'ar stajidi da anavezout dre vras istor ar brezhoneg er mediaoù,
- lakaat anezho da intent, dre selaou, brezhonegoù a bep seurt hag a bep orin diwar dielloù radio/tele,
- gwelet buan-ha-buan peseurt implij a c'heller ober eus an abadennoù keleier brezhonek gant ur c'hlasad deskarded.

KENTEL(IOÙ)

## YANN-FAÑCH KEMENER

stummer evit an oadourien hag arzour



### ► Ar rimoù, rimadelloù, flabenoù...

Pal(ioù) :

- Bezañ gouest da implij, en ur gomz gant ar stajidi all, teir lavarenn da vihanañ (penaos ' ma kont ; lagad ar mestr... ).
- Bezañ gouest da laret flabenn « ar sekred », gant stajidi all.

### ► Ar c'hontadennoù :

Pal(ioù) :

- Bezañ gouest da laret kontadenn ar yarig, gant stajidi all,
- Sevel ur pennad frammet, 2 pe 3 munutenn, diwar un enklasker bennaket ha bezañ gouest dont da gomz dirag ar re all ha kinnig o labour.

### ► An dastumerien :

Pal(ioù) : Bezañ gouest da lenn un tamm deus gwerz *Pennhêrezh Keroulaz*, en ur diwall deus ar rimoù, dirak ar stajidi all.



Sterniet ha buhezet e vez ar stummadur gant stummerien Stumdi a ginnig stalioù a bep seurt (an natur, c'hoarioù hag obererezhioù korf, prederouriezh, ranyezhouriezh, ar gwir, sekretouriezh ha kontouriezh...).

KENTEL(IOÙ) **FANĀCH ROY**  
stummer e Stumdi



▶ **Stalioù-labour video**

Pal(ioù) : Sevel videoioù e brezhoneg ha labourat war an distagadur/troioù-lavar

KENTEL(IOÙ) **GHISLAINE LE GUILLANT**  
stummerez e Stumdi



▶ **Kanañ e brezhoneg**

Pal(ioù) : kanañ a-stroll, tapout fiziañs, deskiñ geriaoueg

▶ **Roiñ un tañva ag ar c'hembraeg d'ar vrezhonegerion**

Pal(ioù) : dizoloiñ ar yezh gembraeg, he c'heñveriañ gant ar brezhoneg, sevel un nebeut frazennoù.

KENTEL(IOÙ) **CLAUDIE MOTAIS**  
renerez Stumdi



▶ **Da betra a servij ar c'hontoù ?**

Pal(ioù) : lakaat an dud da zizoleiñ ar vicher kontaour(ez)

▶ **Petra eo d'an deiz a hiziv ar vicher  
« penn-sekretour(ez) » ?**

Pal(ioù) : lakaat an dud da zizoleiñ ar vicher penn-sekretour(ez)

## KENTEL(IOÙ) **PATRICK DREAN**

stummer e Stumdi



### ► **Natur e brezhoneg**

Pal(ioù) :

- lakaat da anavout an oustilhoù a zo e brezhoneg hiniv an deiz evit anavout an natur,
- lakaat da welet e-menn emañ an ezhommoù brasañ e brezhoneg àr ar poent-se,
- gwelet donoc’h geriaoueg an natur,
- pleustriñ get ar c’heriaoueg-mañ dre un obererezh en natur (baleadenn pe studi un dra resis).

## KENTEL(IOÙ) **PASKAL AR MARC’HEG**

stummer e Stumdi



### ► **Prederouriezh**

Pal(ioù) : Mont pelloc’h gant ar yezh.

## KENTEL(IOÙ) **BRIEG AR MENN**

stummer e Stumdi, buhezour abaoe 20 vloaz evit bugale hag a ra gant ar brezhoneg, gourener



### ► **Sport**

Pal(ioù) : bezañ barrek da zisplegañ c’hoarioù strolladoù pe ampartiz diouzh un tu ha da ziskrivañ emzalc’hioù korf diouzh un tu all. Reiñ un tañva eus ar gouren.

### ► **Treiñ**

Pal(ioù) : bezañ barrek da dremen eus ar galleg d’ar brezhoneg, eus ur galleg diazez, pemdeziek d’ur brezhoneg kevatal ha reizh da gentañ ha war-lerc’h, diouzh live an dud, e vo graet gant testennoù a servijo dezhe.

### ► **Matematik**

Pal(ioù) : boaziañ ouzh geriaoueg diazez ar matematik, gouzout sevel displegadennoù dre gomz ha dre skrid, treiñ. Diouzh live ar stajidi ha diouzh hini ar c’hlasoù o do d’ober gante.

## KENTEL(IOÙ) **DOMINIG BOSSÉ**

stummer e Stumdi



### ▶ **Gwir ha deskadurezh keodedel**

Pal(ioù) :

- lakaat an dud d’ober anaoudegezh gant un nebeut meizadoù a ya d’ober ar Gwir Publik : hini ar strollegezhioù lec’hel,
- adwelet en un doare arbennik renkadur melestradurel Breizh,
- bezañ gouest da ginnig e fin an devezh ur gentel Deskadurezh keodedel dirak an holl.

## KENTEL(IOÙ) **SOAZ MARIA**

Stummez e penn ar raktres



### ▶ **Troidigezh**

Pal(ioù) :

- prederiñ àr an doereioù da droiñ, tapout teknikoù, pleustriñ get skridoù a bep sort.

### ▶ **Labour dre chelaou**

Pal(ioù) :

- pleustriñ a-benn kompren enrolladennoù a bep sort, dre vras ha dre ar munud.

**Bep bloaz e vez digoret kentelioù 'zo d'an holl o deus c'hoant da zizoleiñ ar stummadur :**

**10,00 € an devezh evit tud eus an diavaez / 5,00 € evit stajidi bet e Stumdi.**

**Goulennit ar programm ha lakait ho anv ur sizhunvezh a-raok ar gentel.**



# Stumdi

aozadur-stummañ war ar brezhoneg  
organisme de formation au breton

**LEC'HIOÙ-STUMMAÑ :**

**> LANDERNE**

**MANER KERANDEN BP 311  
29413 LANDERNE CEDEX**

**> PLAÑVOUR**

**KREIZENN AMZER NEVEZ SOYE  
56270 PLANVOUR**

**SEZ SOKIAL :**

**MANER KERANDEN  
BP 311  
29413 LANDERNE CEDEX**

**TÉL. : 02 98 21 39 94**

**FAX : 02 98 85 04 37**

**E-MAIL : [bzh.stumdi@wanadoo.fr](mailto:bzh.stumdi@wanadoo.fr)**

**SITE : [www.stumdi.com](http://www.stumdi.com)**